

Er werz-ma, koz, sur a-walc'h, a zo meur a dra
 da gompren ; ar pezh a gaera 'zo en-an, a lenner
 adalek ar poz 13^e. Ar pezh a deu war-lerc'h a zebant
 tennet dez euz eur c'hantik benak gret gant an Tad
 Maner.

Kerfot, an 18 a viz Here, 1897.

Bennoz an otro zant Ervoan (*bis*)
 A roan d'am zad ha d'am mamm.

'Re-ze a zeve beure mad (*bis*)
 Da vont da chaseal d'ar c'hoad.

N'e ket eur c'had a chaséiz ;
 Eur goulmik wenn a rankontriz

O tarnijal a-uz d'am fenn ;
 Hano Jezuz 'oa war he fenn.

Hano Jezuz 'oa war he fenn,
 Ha greunik Mari 'n he c'herc'hen.

Ha me o c'houlen diant-hi :
 « Koulmik, deut gan-en d'am c'houldri.

Hent ho kouldri a zo kollet ;
 Hent ar baradoz nan e ket. »

'Me skei eun tolik war eur bod ;
 Ar goulmik 'vont 'tresek he roud.

Ar goulmik 'vont 'tresek he roud,
 Entresek chapel Gerdennou,

'Me 'vont d'ar c'hapel war he lerc'h,
 'Welet Jezuz kaer 'vel an erc'h,

'Welet Jezuz viziblamant,
 En e doru eur c'hali arc'hant ;

En e dorn eur c'hali arc'hant,
 Prest d'ober nag eur vadeiant.

'N hini 'vo bet er jujamant
 A welo kalz a chanchamant.

'Tioro ar mein, 'fraillo ar gwe,
 An dud varo 'dei dez o be.

'N otro zant Mikael a deuio
 Gand eur valans a gompoezo.

Ha mar be trec'h an drouk d'ar vad,
 Ze 'vo evid-omp kalonad ;

Ha mar be trec'h ar vad d'an drouk,
 D'ar baradoz ac'h efomp tout.

(Gwerz kanet gant Josephine ha Jeanne
 Nicolas, 9 ha 11 vla).